

17
AMZER AN EST

92

WAR DON : *Ar* *benheres* a Geroulaz

An *tesko* (1)

(1) Pennou ed-

Penno-ed breman *e* weler

O velenan er parkeier ;

Ha *mar* *tolet* *plad*
Mar tolet evez, e welfet

Lod anê sonn, ha lod stouet.

Sarn

dan *zoll*

An *tesko*
Pa ve zavet sonn ar penno,

ed *eur* *merk* *mad*
~~Stin~~ *eur* *merk* ec'h int goullo ;

Ha pa c'hint stouet er c'hontrol,

Zur mad, a c'hæun int karget holl.

merk
En-touez an dud eo memez tra :

Bemde ve gwelet tud netra

ed
O fenn ganthe zavet uhel...

Nan euz eanthe nemet avel !

c'haull
Ar re avad a ~~gar~~ bean

Kuzet er lec'hio izelan

An holl a *c'haull* ~~dar~~ a zo enthe

Vertuio kaer leiz *leun* ~~e~~ ine.

*

'Vit an deio e vo gwelet

An ed, er parko melenet,

O kouean rengen ha rengen

Skoët gant falz ar vederien.

An dud a zo evel an ed ;

Bemde dre bevær c'horn er bed

E ve diskaret kalz ane

Gant falc'h an Anko didrue.

Skein 'ra an Anko 'vel eun dall

Gweich en tu-mæ, gweich en tu all ;

War an den paour hag ar pinvik,

War an den koz hag ar babik.

Evruruz neb a boagn dalc'h-mad

Ma vo e ine en stad vad :

Pa vo skoët gant ar maro,

En Nenv dor digor e kavo. —